

Græt gant Per AR YANN, var eur Maleur arruet e Quemper-Corantin, da Sul ar Baczion.

Var ton : **Pevar Den a barrès Pluffur.**

Deoc'h-u eta, Guerc'hes Vari.
E teuan den n'em recommandi ;
D'am Eal mad a dar Speret Santel,
Da rei dign sclerigen hep appel.
Mar tisclerjign e ber amser
Ar malheur so erruet en Quemper ;
Quement à gtevo e c'hana
A dleffe e oad donned da yenia.
Clevet oc'heus comps a valeurio
Cals a dud drezenni ho deus souffret ar maro ;
Mæs evel qrent ar c'hruella poan
E tevi e beo e creis an tan.
An autrou sant Loranc beniguet,
Hennes a ouffe deoc'h lavaret
Peguen cruel eo ar poannion
Ho tevi e beo e creis ar flammou.
Deiz evit deiz da nòs sul ar Baczion,
Are-me ha voa joüis a galon ;
Allas ! na sonje hini a ne
Evije hirroc'h au nòs evit o bue.
Prest goude an unecq eür
E voa commencet ar maleur,
E maïnt ho tevi e creis an tan
Quercouls ar bras evel ar bian.
Allas ! ma bugale, emezi,
E creiz an tan red eo devi
Hep na galloud en em souten
Na caout sicour digant den.
Eur soudard e voa oc'h ober faccion
E quichen dor ar prison,
Ha pan deveus guelet an tan goal
Eo bet commencet da grial :
An hep so cousquet dihunet,
Car ar maleur a so presset :
Deomp da zicour ha da souten ;
Mæs, allas ! n'eus quet a voyen.
Pa voant eat e penn an ty
E clefjont ar c'hlem hac ar c'hry
Gant ar vugale hac ar vamm
Ho tevi e creis an tan flamm.
An tocqsin hac an taboulin
A sonne e Quemper-Corantin
Da avertissa ar bomperyen,
Car ar malheur a zo certen.
Dont a rezont bras a bian,
En eur gryal : dan tan, d'an tan !
Hini a bed na boultrone
Evit mont e danger he vue.
An escop hac ar veleyen,
Ar freret hac ar scoleryen,
Tuc'hentil ha payzantet
Tout e maïnt oll o redet.
Ar soudardet, ar gard national,
Tout e redont a ractal
Ma vije moyen var boès sicour
E vije obtenet dezo recour.
Ar gendarmet, an archeryen poulicz,
Ar c'homiczer a re a licz.
Da zerc'hel dour dar bomperyen
Da dauler var neïn an doën.

Allas ! ma c'halon a vancq dign,
Va goad em goaziet a teu da frimi
Pa songean n'oc'h'eus elevet netra
Evel ma lavarin deoc'h brema.
Pa glevas ar vamm e bugaligou
O crial e creis ar flammou,
A rea muyoc'h a boan dezi
Evit ma rea an tan eus e devi.

Credet hardiz va foannio zo bras,
Ar c'hicq oar va æsquern zo dija poas,
Ha c'hoas e carfen am be da souffri
Poannion va bugale gant va hini.

E map oaged a drivoac'h vloa
Gant eur gourach eus ar vrassa
En nem laosq dan traon eus an eill estach ;
Credit e hesquernigou a stracas.

Eur c'hostez anezan a voa grillet
Hac e galon a voa mantret,
C'hoaz e zave ene zao he-unan
En eur goulen : Pe-leac'h e man va mamm ?

Dan hospital e voe douguet
Ep trista stad ma affec'h da velet,
Un tu a nezan grillet gant an tan
Hac e galon mantret gant ar boan.

Diou verc'h e devoa ho servichi
Pa voa annoncet dezo ar maleur cri,
Ma lavare an eil hac e ben anezo ;
Me garfe 'vent o vont d'an douar ganto.

A-dalecq an eür eus a vrema
Betec an eur diveza,
Pa teuyo d'in sonch eus o maro,
Va daoulagad a ranco scuylha daëro.

Ho æsquernigou a zo dastumet
Nemed ar re zo bet luduet ;
Lacqueat e zint ho fevar er memes goëst
Ha casset dar veret assemble.

Eur pobl dud a voa en ho enterramand,
Qen bourc'hissyen qen payzand ;
Ho c'halono tout a sesye
Hac an dour gant ho diou jod a rede.

Me ho suppli, ô va Jesus !
D'ober outo eur zel truëzus ;
Prezervit a nezo eus tan ar purgatoar
Pa zint devey e beo var an douar.

An nep zo bed quirecq
Eus ar maleur a zo erruet
A voa cousquet et marchosi
Pa zeuas an tan den difuni.

Sortyet e bet e secret
Pes a zo caus ma ze punisset.
E lec'h beza dihunet tud an ty
A ranc ober e c'hunan e sorty.

Avoalc'h em beus deoc'h lavaret
Evit ar blijadur o peus bet eus ma c'hlevet ;
Monet a ran da finissa
Dre eur maleur ar c'hruella.

An deiz varlerc'h, e parres Plomeur,
A zo arruet ar memes maleur
Gant eun den privet a sclerigen ;
Silaouet tout guytibunen.

Renan Caoudal en e vele
A goeze an tan var e c'horre,
Mac evit sonjal en em sicour
E tiredas da doul an nor.

Allas ! an or a voa alc'hoët
Sortial er mes ne alle quet,
Bale e lec'h mar care dre an ty,
An tan a voa bepret eus en devi.

En toul an nor e ma bet couet,
Hac eno e zeo bet chomet,
Ha pa voar deüt da zével anezan
E couêze e entraillou deoutan.

E æsquern a zo bet destumet
Nemed eur vrec'h dezan ne quet bet cavet ;

Hounnes zo bet luduet quicq hac æsquern,
Oh ! crissa maro eta, christenien.

Cetu eur melezeour aman ;
Ma breur, ma c'hoar, sellomp ennan,
Da laret eo ; redoublomp hor pedennou
Ma pellaï diouzomp ar goal blanedennou.

Quement a glevo ar guers-man
A dleffe lavaret da neubeudtan
Bep a Bater a peb a Ave
E delivrançz deus ho ene.

O va Jesuz ! me o suppli,
Bezet eta truhez ouzomny :
Recevet ac'hanomp en ho gloar
Pa ezaïmp quit divar an douar.

RECIT

*Composet a nevez var sujet ar Maleurus an eus tennet var ar Grucifi,
en departamant a l'Oorn.*

VAR UN TON TRIST.

BRETONET, me ho supli, tostait da glevet
Ur recit deus un exempl a nevez arruet,
Mar he madeles Doue rei din ar sclerigen,
Emeus c'hoant da disclerian en toues ar gristenien.

Un den a religion a glevo quement-ma,
E oat hac e oaziou a deuïou da grenna ;
Ma unan eo troublet ma speret en antier
O clasq dibab er sæcouñ da rei da intent scler.

En heisvet devez voar nuguent a vis gouelen,
Er blaves c'huec'h var nugent, c'helaouet, cristenien,
E voa en daou den maleurus gant an hent e vonet
Evit ober ur veach o devoa prometet.

Unan deus an daou den-mâ a voa ur chasseur,
Hac a beai an droit chasse da vale e gartier,
Hac a dougue e fusilh partout elec'h ma hai
Dre ma voa bet surprenet er c'hoat gant ar lonet goue.

Hac o tonet da dremen ur c'halvar a nevez
Savet en tal ur veret en fin ur jubile,
Haca doug ar figouriou demeus ar bassion
Eu eus souffret on Salver da bean on rançon.

Unan a nes a dennas e doc divar e ben
Evit ober e dever evel ar gristenien,
Da saludi ar Salver santel a biniguet
Abalamour den imaich a voel crucifiet.

Distraï res ar maleurus pa voeles quement-mâ ;
Dre ur gos injurius a c'houlennas ostantan :
Da betra tenes da doc, eme, den ingrat,
Te sonch dit bea salvet o saludi eun tam coat ?

— Guelet a ran dirason da vestr a ma hini
Laqueet dre hon fec'hejou ebars er grucifi,
Ha pe deuio don guervel vo ret apparissan
A rentan cont dar barner pa sonjomp nebentan.

— Arret a me a discoueou dit en un instant
A pe fel did lavaret eo cren a puissant,
Brassec'h mestr e hon evitan pa man er grucifi,
Me he disquenno d'an douar hep donet d'e bidi.

Sevel e ra e fusilh hac eneus-an tennet
Voar en imaich adorabl eur ar Christ biniguet,
Ha dre an tou! en eus gret e stringas er goat
Quen e he bet abimet bijas ar miserabl.

Dre ar boize deus an torfet e deus bet cometet
E tigores an douar hac en eneus-an lonquet
Dre bermission Doue betec e diou gasel
Ma voe rentet en ur stat pitoyabl a crnel.

E gamarat pa velas quement-mâ
A dap croc en e divrec'h evit essa e denna,
Misericord e crias a ma voa estonet
Ha ma c'hes d'ar presbyter evel un den egaret.

Supplia a ra ar c'hure da dont gantân an ent
Hac e teuont assambles da visitan an exempl ;
Fatiqnen ra ar belec pan o deus guelet ar goat
O tond deus ar grucifil eus an den miserabl.

Er spaç deus a bemp devez eo bet er plaç-ze :
Na neus den evit compren ar poaniou a souffre
Dre bermission Doue dalc'het en e brison
Quen a deu an autrou'n Escop hac e brocession.

Ar c'hure, an den-ma a bartias en quer
D'ober declaration en ur memes amser
Dirac an autrou'n Escop hac an oll sujedet,
Hac o lenn a jesteri e voan oll estonet.

Ar sul vintin e pignas an autrou'n Escop
Er gador a guirionez evit avertissan ar bobl
Da donet de accompli gant e brocession,
Ma teugent d'ar plaç santel gant guir devotion.

Pa voa ar bobl d'an daoulin dirac ar groas santel
Dre bermission Doue e aparisses daou Ell,
A gante pobl a venvec da doulag an donar
Evit rei e liberte d'ar paour quer criminal.

Douguet eo d'an ilis d'assistan en oferen
A celebre an Escop hac e oll veleyen
Da drugarecât Doue hac on Mam biniguet
Deus ur c'hraç quen admirabl o deus dezi accordet.

A c'hane a voa transportet gant e vam hac e dat
Da finissan e vuez en eur stad pitoyabl,
Mut, bouzard hac innoçant a rent e isely
Mep galloud en em zicour a hini mui quiny.

Pevar devez var nuguent eo bet en e voele
O souffr poan a pinigen quen rentan e ene :
Goulenomp oll a galon ma vezo recevet
Gant Jesus hac ar Verc'hes e pales an Dreindet.

An den-mâ a oa oaget deus ur bla var nuguent,
A barres Sant-Yan ar C'hoat, evit rei da entent,
En departamant a l'Orn ; selaouet, cristenien,
Un exempl considerabl a spontus da gompren.